

YF_0093_Perinaig Lanuon

Cette complainte raconte l'assassinat par deux maltôtiers de Perrine Le Mignon servante de l'auberge où ils étaient descendus. C'est l'orpheline de Lannion du Barzaz-Breiz où La Villemarqué situe le drame en 1693.

Er bloavez mil eiz kant c'hwec'h daou ugent med pemzeg En l'an 18??
E-barz ar ger a Lannuon nag eur malheur c'hoarvezet

Deut gand ar vatez vihan a oa bet o servijin
E-barz ti ar homiser gwin o terhel ostaliri

En em gavas daou valtouter un nozvez da goanian
Da regali a nouei evid en em zivertissa

Pa naint debret hag evet, pes a rae vad dezo
Naint goulet an ostizez evit ober kont ganto

Naint goulet an ostizez evit ober kont gante
Pe ar vatez Perina d'o honduin ahane

Homan a oa ur wreg vat karget a vadelez
Ur goulou hag ul letern he-deus roet d'he matez

Red e vo dit 'ta matez o letern a goulo skler
D'ambroug ar valtouterien d'en traon gand ar ruiou ker

O vond a ra Perina na d'en traon gand ar ru
Pa oa an daou valtouter unan anezho a bep tu

Ma karit-c'hwi Perina dond ganin-me d'am zi
Me a roio deoc'h da danva deuz an daou, tri sort gwin

Trugarez deoc'h aotrounez deuz ho kwin ar gwellan
E ti ma mestrez zo pevar sort, pa garan da evan

Ma karit-c'hwi Perina dond ganin-me kontant
M'ho lako gouarnourez war ur gambrad arc'hant

M'ho lako gouarnourez war ur gambrad arc'hant
Hag an alc'houez ez kodell da gemer pa '-po c'hoant

Trugarez deoc'h aotrounez d'ho arc'hant ha d'ho aour
Me 'n em gontant deus ma sor, o ker meus bezan paour

Red e vo deoc'h Perina sentin deus ma homzou
Rag n'ho-po ket a letern keneubeut a houlou
(Perag ' vouchit ket ho letern ha lac'hit ho koulou)

Ma vouchan-me ma letern, lac'han ma goulou sklaer
Peseurt mod 'ta tud gentil, tistroan-me d'ar ger

Met neuze oant dihellet barz an hent an dorn klei
Ennan neuze n'oant graet dezhi pezh a zanjit oe graet dezhi

Breman p'ho-peus me disinoret, lemmit ganin ma buhez
N'am lezit ket war an douar d'ober mezh d'am lignez

Rag me am-eus ur breur beleg e-barzh en ker e Lannuon
Na pa glevo kement-se, rannan a raio e galon

Ha me am-eus ur c'hoar Leanez e-barzh en kouant
Landreger
Na pa glevo kement-se, moned a raio en desesper

Na homan oa ur wreg vat ha karget a vadelez
A chome war gorn an oaled da c'hortoz he matez

Sonet e oa unneg eur, na prest d'an hanternoz
Hag ar vatez Perrinaig bezan ket d'he repos

An aotrou p'en-deus klevet lampas er-mez e wele
Tap ar goulou hag al letern hag a gomans bale

Honnez a zo o servijin e-barzh ma zi breman zo seiz vloaz
zo
Ha me renko he rento nag en bev pe en marv

Ha dre ma yae gant ar ru, ar brud a yae a-raozan
Matez an aotrou komiser a zo kollet en noz-man

Tal kichenn kouant Sant Josef, ar plac'h a zo kavet maro
Hag al letern en he hichen hag ar goulou bev eno

O setu aze ur stad kruel evid ar servijerezed
P'eman debret ganto o c'hoan, da belec'h o laosked

naint = int -> o-deus
goulet = goulennet